

*Pat M. Jaapt  
R<sup>e</sup> de Gathen*

# SANT-EGAT PATRON PLOUÉGAT-GUERRAND

---

## Buez ha Peden

TON : *Eurus ann hini....*

### DISKAN

- Egat beniget, Patron ar barrez,  
Roit da Blegadis feiz ha karantez. (*bis*)
- 1 Yaouankik c'hoaz, a vec'h pemzec vloaz,  
Dar feiz ho peus roet eun testeni bras.
  - 2 Tensor presius eun Tad ag eur Vam,  
Eo eur buguel fur gant eun ene flam
  - 3 Crouadur sentus, potr a galon vad,  
Ho furnez a ia var gresk gant an oad
  - 4 Ha desket ganec'h al lezen gristen,  
E santit dija ho peus nerz eun den
  - 5 Hag e guirionez, biscoaz tourmanchou.  
Na boezas kement var gorf na memprou.
  - 6 Ervez eun doctor, goad ar Verzerien,  
Eo an had a ro ar vuez kristen.
  - 7 Choui, merzer yaouank, dre ho pedennou.  
A ro da Zoue kalz a eneou
  - 8 Rac pa zoc'h galvet dirag ar barner,  
Ho peuz respountet : Me zo d'am Zalver.
  - 9 D'ho toueou fos me ne soujin ket,  
Ha deus ho fulor ne m'eus aon ebet.
  - 10 Kerkent ar souetou a blomp goarniset,  
A gouez var ho korf... Choui ho peus pedet.
  - 11 Hag ar beden-ze deus pemp kant payen  
A ra var an heur pemp kant all kristen.

- 12 Mes dirac ho tud hag ho mignonet  
Daoust ag ous ar boan c'houi vo ker kalet.
- 13 Da Brenest kaset, tolet er prison,  
Epad pemp devez e c'houzanvit naon.
- 14 Elez eus an Env, eus a bers Doue  
D'ho memprou skuiset ro eun nerz neve.
- 15 Var ar chevalet ho korf astennet  
Gant eun dro er rod a zo disjoentret.
- 16 Var ho penn e noaz glaou ru zo laket,  
Hag a as d'an tan e lonkit moget
- 17 Mes Egat, e kreiz he boaniou scrijus,  
Laouen a lavar : Me zo da Jezuz.
- 18 Skoi a rer varn'han, hag he vouzellou,  
Zo laket e noaz dre nerz an toliou.
- 19 Hag evit kreski poaniou ken garo,  
Var bep gouli e skuillont dour bero
- 20 Ken trankil a tra, he visaj joaius.  
Egat a bede he Zalver Jesus.
- 21 Neuze en arraj, he zent, he jayed  
Gant an taoliou dorn zo dezan brevet.
- 22 Ar bourreo cruel, dre he oll gounnar,  
A goez maro mik ractal d'an douar.
- 23 Neuze Aurelien a deu he unan  
'Vit oblij Egat da zenti d'ezhan.
- 24 Gant he gomzou flour e klask en deseо,  
Rac eals tor en deus o c'hoas ar maro
- 25 Roit ar maro din, a lavar Egat,  
Mal e ganen mont da gavout va Zad.
- 26 O potr insolant, lavar ar bourreo,  
Gant a loened mud te gavo maro.
- 27 Hag an den yaouank d'ar Cirq zo kaset  
An oll a grene, hen doa spont ebet

- 28 Egat er he zao, he zel en envou.  
Croaziet he zaouarn, ra he bedennou.
- 29 Mez ker ber a cont, oa var al leuren.  
Daou leon gouez dirac ar c'christen.
- 30 Ho lagad a verv, ho alan a zeo,  
Prest int da zrailla kement a zo beo.
- 31 Evit en dispen, a lam e saillont.,.  
Mez en he gichen gourvez a reont.
- 32 Ha gant ho zeod e lipont ar goad  
A ziruill bepred deus blesou Egat.
- 33 Me mo da vuez, kristen aheurtet,  
Eme an tyrant : te vo dibennet.
- 34 Kasset eur pennad er meaz deuz a gêr  
E oa dibennet Egat ar merzer.
- 35 Plijadur, danvez, henor ha gloar  
Evel ar moget dremen en douar
- 36 Pa rankimp tremen evit ar bed all.  
Ganemp e chomo buez vad pe fall.
- 37 Merzer gloriis, ni ho ped hirio,  
Sellit a druez ouzomp hag hor bro
- 38 Dilivrit a zrouk hor bugaligou.  
Hag o po bennoz digant ar mamou.
- 39 D'hor yaouankizou roit ar furnez  
Hag e viñt d'ho zud joa ar vuez.
- 40 D'an dud oajet ha tost bras d'ho bez.  
Astennit ho torn, sellit a druez.
- 41 Varn'omp Plegadis, beillit deiz a noz,  
Hag e c'hellimp sur mont d'ar baradoz.

*Imprimatur :*

*y. M. Fagot*

QUIMPER, CE 9 AOUT 1904.

F. CORRIGOU,  
Vicaire Général.